



AR PILLAOUER

DISKAN

Foei, foei, foei, ma zammik aotrou,
Gant e stoup hag e billou.

1

Ma zad en deuz ma dimezet
Gand eur flaerius pillaoer (hadlavarout);
En Lokeffred ez eo ganet,
En komanant Toul-al-Laer.

2

Rakta an Anjelus sonet,
Gant kleier braz ar Fouille, (had.)
Ma lapousik, prim dihune,
A sav'et meas deus e wele.

3

Draila 'ra eun hanter pater,
Tana 'ra e gorn-butun (had)
Kemer a ra e grog-pouezer,
Evit mond war hent Sizun.

4

Pa'n deuz kavet kamaraded
Ebars eun davarn bennag, (had.)
Meur a vane en deuz evet,
Vit lakaat e gorf distag.

5

Dispigna ra en eun dervez
Gonidegez eur Zizun (had.);
Me choum alies intanvez,
Ebars ma gwele, ma-un.

6

Bep gwech ma 'za d'ar pardonioù,
E vez ato mezo dall: (had.)
Darbet oa d'han koll e vragou,
En Lokeffred, an deiz-all.

7

Pa vez pignet war e azen,
E-touez e dammou pillou, (had.)
Evel eun Impaler romen,
Ez eo berr en e gomzou.

8

Mar deufe ar c'hiz er vro-ma
Da derri an dimeziou, (had.)
Me a iafe, en eur gana,
Pell deus paotred ar pillou.

9

Pa zeuio Karrik-an-Ankou
D'ober eun dro er vro-ma, (had.)
Me a ielo war e roudou
Vit ma teuio d'hen samma.

10

Komzet 'vo 'dan aotrou person
Deus ar flaerius pillaoer, (had.)
'Vit ma kano alliberon
Hag ouspenn al liberer.